



***Pourmenadenn  
e Brezhoneg  
e Roc'h an Argoat  
D'ar Sul 3 a viz Ebrel  
Adalek 3 eur d'an abardaez  
(Digoust ha digor d'an holl!)***

Gant tud kevredigezh Andon a zo he fal reiñ lañs d'hor sevenadur ha d'he stummoù lieseurt (en ur sikourat war un dro Skol Diwan Kistreberzh), hon eus soñjet e vefe mat kinnig darvoudouù e brezhoneg. Gwir eo, e vank re alies d'ar vrezhonegerien tro d'en em gav evit implijout yezh ar vro gant plijadur.

Evel just eo digor d'an holl a zo tomm o c'halon ouzh ar brezhoneg, ar re o teskiñ er c'hentelioù noz gant poan a wechoù, ar re ampart war ar yezh ha brezhoneg flour ganto hag evel just ar vrezhonegerien a vihanik bet desket gant chañs ar yezh war barlennoù o mamm.

D'an dud se e kinnigomp en em gavout d'ar sul 3 a viz Ebrel da 3 eur d'an abardaez e kichen ar puñs war blasenn ar kreiz kér (hini al luc'hskeudenn). Mont a rimp neuze d'ober ur bournemadenn war henchoù Roc'h an Argoat (6 kilometrad pe un eurvez hanter da ruzañ ho potoù war an henchoù kleuz en ur vrezhonekaat). War un dro e vo klasket kinnig un nebeut dispelegadennoù war istor ar geriadenn. Da heul, ma n'hor ket re skuizh e dibenn an abadenn e vo echuet an endervez e-barzh un ostaleri bennak en dro ur werenn pe ur banne kafe.

***Promenade en Breton à Rochefort en Terre le dimanche 3 Avril,  
à partir de 15h.  
Gratuit et ouvert à tous !***

Le but de l'association Andon est de promouvoir la culture bretonne sous ses formes les plus diverses tout en accompagnant l'école Diwan de Questembert dans son développement. Avec toute l'équipe nous vous proposons d'organiser régulièrement des évènements en langue bretonne. Il est vrai, les occasions de se retrouver entre bretonnants pour pratiquer la langue ne sont pas fréquentes.

Bien entendu, ces évènements sont proposés à l'intention de toutes celles et ceux qui se sentent proches de la langue bretonne : élèves de cours du soir, bretonnants confirmés, bretonnants de naissance.

Nous vous proposons donc de vous retrouver le dimanche 3 avril prochain à 15h sur la place centrale de Rochefort en Terre, près du puits (celui de la photographie). Nous emprunterons les chemins creux pour une promenade de 6Km autour de la cité médiévale (1h30 de marche environ). Toujours en breton (evel just), nous essayerons de vous proposer quelques explications sur l'histoire et l'architecture de la cité. A l'issue, s'il vous reste quelques forces nous nous retrouverons autour d'un verre ou d'une tasse de café.